



# KANTIK

en enor

## d'ITRON VARIA 'BLISTIN

TON : *Kelven*

### DISKAN :

*Itron Varia 'Blistin,  
Hon Fatronez karet,  
Aboe amzer sant Jistin  
Er vro-man enoret,  
Gret eur zell trugarezuz  
'Trezek ho pugale,  
Ha goulet digant Jezuz  
Skuilh e vennoz warne !*

Pa ziskennas sant Kare

War douar hon farrouz,

'Savas d'Ec'h, en Langare, (1)

'N eur lec'h koant ha didrouz,

Ar chapel gentan pleustret

Gant kristenien ar vro ;

Karet 'ta hag enoret

Ez oc'h aman pell 'zo !

(1) Goude chapel Langare-Blistin, Sant-Kare a reas sevel  
kentan chapel Itron-Varia-Drue, war douar Lanvellek.

Sant Kare a brezege  
Seiz-Glac'har ar Werc'hez,  
Itron Varia-Drue  
'Deuas, a-c'houdevez,  
Da vean, er c'horn bro-man,  
Ar Vamm 'r muian karet,  
Dre m'eo ar Vamm ar gwellan  
'Vit an dud glac'haret !

Epad pevarzek kant vlâ,  
N'ho peus ket paouezet  
Da chilaou, da skoazella  
Ho pugale karet ;  
Meur a vurzud a embann  
Ho kalloud en Nenvou,  
Hag ho madelez a splann  
A-hed ar c'chantvejou !

Pa 'ress Javre kentan, (988)

Roue Breiz d'ar c'houlz-ze,  
Ober sevel, el lec'h-man,  
Ha diwar e leve,  
Eun iliz evit laket  
Relegou sant Efflamm,  
C'houi, Gwerc'hez, 'voe dibabet  
'Vel Patronez ha Mamm !

Tremen c'houec'h kant vlâ goude, (1628)

Breuriez 'zo 'n he za,  
En enor da Vamm Doue,  
Itron ar Rozera,  
Ha Plistin 'n eus e Bardon  
De zul ar Rozera,  
Testeni sklaër ha gwirion  
Ez omp ho peadra !

Hed-da-hed ar c'hantvejou,  
Patronez galloudus,  
Aman 'c'h eus, d'an eneou,  
Roet grasou nerzus,  
Aman, c'houi c'h eus gwelet Fe  
Ha bugale doujus ;  
Teurveet, o Mamm Doue,  
Bean c'hoaz truezus !

Rak ar fall 'zo dirollet  
War hon Breiz-Izel gêz,  
Ha kaiz a dud 've kollet  
Dre ne dôlont evez,  
Dre n'ouveont ken pedi  
Na pleustri an Iliz ;  
True oute, o Mari ,  
Gret 'teufont war o c'hiz !

En tad hag er vamm gristen,  
Miret Fe hon tadou,  
Gret ma 'savo 'n o c'hichen,  
'Vel pinvikan madou,  
Bugale, tud yaouank fur,  
Enne doujanz Doue,  
Hag a vo o flijadur  
Diskouel ive o Fe !

Harpet an den 'n e gozni,  
Frealzet e ine ;  
Sikouret kement hini  
A zo dign a drue ;  
Dindan ho mantel, Gwerc'hez,  
Kuzet ho pugale,  
Miret hon farrouz a-bez  
War hent lezenn Doue !

Neuze, bet darempredet  
Iiz koz hon farrouz,  
D'imp bevan 'vo bet êzet  
Ha mervel 'vo bet dous,  
Da c'hortoz darempredi  
Baradoz kaër Doue  
'Lec'h ho meulfomp c'hoaz, Mari,  
'Pad an eternite !

Y.-M. G.

IMPRIMATUR  
Briocci, die 29 Augusti 1934.

E. LE BELLEC,  
Vic. Gén.